




**ken vreuriez
AR BREZONEG**

KAIEROU KENVREURIEZ ar BREZONEG

TAOLENN an NIVERENN 31

oooooooooooooooooooooooooooo

1. An overennou e brezoneg en eskobti Gwened.....42
2. Evid lida ar Basion.....43
3. Overenn ar Bloavez Santel pe Bloavez ar Jubile.....53
4. Ur gerig diwar-benn ar Bloavez Santel.....51
Pedenn evid ar Bloavez Santel.....52
5. Sakramant an NOUENN.....1/59
6. Induljañs ar Maro Mad.....8/66
7. Lennadennoù evid ar re glañv.....10/68
(al lennadennoù-se a gendalho en niverenn 32)

oooooooooooooooooooooooooooo

Evid kaoud:

- Kaierou Kenvreuriez ar Brezoneg.....20 lur (5 niverenn)
KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr T30 lur
KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr B.....20 lur
KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr C.....20 lur
AR BRIEDELEZ.....8 lur
LEVR AN OVERENN (embannadur nevez)

o goulenn digand : JOE SEITE - skol-an-aod - Gwisseny

C. C. P. 1738 - 66 REMNES

Troidigeziou aotreet da arnod evid
an eskobti a-berz an Aotrou F.Barbu,
eskob Kemper ha Leon.

Kemper - 12/03/1974 Visant Fave
eskob-skoazeller

An overennou e brezoneg en eskobti Gwened

Gand Bro-Wened ez a ar maout heb mar ebéd. Or gourhemennou c'hweka a ya d'an Aotrou Meriadec Henrio, person Lokoal-Meudon ha d'ar strollad e-neus bodet endro dezañ.

Setu amañ, hervezañ, ar parrezioù o-deus bet overennou-radio: Santez-Anna-Wened, I.V. Kelven (parrez Guern)-Plouhinec-Langonnet-Noyal-Pontivy-Quistinic-Arzano-Caudan-Merlevenez-Camors (1973).

Roll ar parrezioù o-deus bet d'an nebeuta eun overenn e brezoneg, etre miz c'hwevrer 1970 ha miz gwengolo 1973:

Langonnet (overenn e brezoneg beb miz, abaoe an overenn-radio er bloavezh 1962 - Quistinic (overenn beb miz, d'ar zùl kenta ar miz, en iliz parrez hag er chapelioù).

A-hendall: Gestel (2) - St Caradec-Hennebont (1) - Languidic (4) - Merlevenez (4) - Lorient (5) - Kervignac (2) - Stival (2) - Pontivy (1) - Caudan (5) - Plumelin (3) - Landaul (4) - Le Sourn (3) - Baud (2) - Calan (5) - Brech (6) - Noyal-Pontivy (1) - Landevant (1) - Plouhinec (1) - Plouay (2) - Lanvaudan (2) - Lochrist (3) - Pont-Scorff (3) - Larmor-Plage (2) - Penquesten (1) - Branderion (1) - Ste Anne d'Auray (1) - Inzinzac (1) - Lanvenegen (1) - Queven (1) - Saint-Yves-Bubry (3) - Persquen (1) - Plouharnel (5) - Naizin (2) - Auray (1) - Ploemeur (1) - Bubry (3) - Plouvigner (4) - Saint-Avé (1) - Carnac (1) - Lanester (1) - Le Bono (4) - Arzano (2) - Melrand (1) - Mendon (5) - Camors (2) - Bignan (1) - Nostang (1) - Sainte-Hélène (2) - Saint-Gilles (1) - Grand-Champ (1) - Inguinél (1) - Lorval (1) - Locmalo (2) - Gourin (3).

Setu aze eur brao a roll; 54 parrez m'am-eus kontet mad. Ha n'eus nemed an hanter euz an eskobti hag a gomz an dud brezoneg enno.

Peurvuia an overennou e brezoneg o-deus dedennet kalz tud; evel-se e Lochrist: 400 dén e-leh an 40 da zùl.

War ar zizun eo stank ivez an overennou lavaret e brezoneg e lod parrezioù dreist-oll epad ar Horaiz, miz mae, miz ar Rozera, da geñver gouelioù Sent Breiz.

Stank eo ivez an overennou lavaret e galleg gand kantikoù e brezoneg hag eul lodenn euz ar zarmon e brezoneg.

Eul lañs mad a zo bet roet d'an overennou e brezoneg en eskobti Gwened; fiziañs on-eus ez ay atao an traou war raog!

K. ar B.

EVID LIDA AR BASION

AN DIGOR :an ograou.

kan - Amañ e hellfed kemer lod pe lod euz KANTIKOU ANAVEZET :N° 120 Gouelit,
va daoulagad,gant an ton el levr CANTIQUES BRETONS N°2 - An AO,Roje Ab-
jen,Montroulez.

1. Gouelit,va daoulagad,setu maro Jezuz!
Maro Jezuz 'vidom,peherien gwalleüruz!

DISKAN :

Maro Jezuz 'vidom war beg Menez Kalvar,
pe galon ne ranno gand keuz ha gand glahar?

2. Tosta,peher,ha deus,sell mad ouz da stour;
peb pehed grêt ganit 'zo amañ torfetour.
3. Deus da gichen ar Groaz ha gouel d'az pehejou!
Soñj mad ez int bet kaoz da grizder e boaniou.
4. Evid ho kervel c'hoaz,e benn a zo stouet,
e galon 'zo digor,e zivreh astennet.

Hent ar groaz (levr kantikou,pajenn 225)

Heuliom oll,heuliom a spored
Jezuz beteg ar Halvar.
Soñjom en e boaniou kaled,
soñjom enno gand glahar.
Dre ho Kroaz hag ho poaniou,
grit ouzom eur zell a druez,
pardonit va fehejou!

Doue,gwir bried (levr kantikou,pajenn 41)

- | | | |
|--|---|--|
| 1. Pignom,va ene,
war ar Halvar!
Gwelom eun Doue,
leun a garantez,
gwelom eun Doue
leun a hlahar. | 3. Gwel-heñ diwisket,
savet er Groaz,
e zaouarn staget;
e gostez toullet,
e zaouarn staget
gand tachou braz. | 5. D'ho treid e pokan
gand Madalen.
Re e talean
re bell e kasan,
re e talean
va finijenn! |
| 2. Edreid 'zo gwriet,
gand an tachou,
e gorr dispennet,
e benn kurunet,
e gorr dispennet
gand ar fouetou. | 4. C'hwi a zo bepred
eur gwir Zalver,
ne houlennit ket
e ve den kollet,
ne houlennit ket
koll ar peher. | 6. Jezuz,o Gened
bepred nevez!
Poent eo ho kared,
Salver benniget!
Poent eo ho kared
e gwirionez! |

Bez 'ez eus c'hoaz "Keuz d'ar pehed "(Parce Domine)niv.40.
pe "Ar peher e-tal ar Groaz",niv.42.

Koublad pe goublad a hello beza kanet a vare da vare,pa vo merket:KAN.

Ar beleg a lavar eun nebeud gerioù evid saludi ha digemer an dud,evelhen pe en
un doare all:

bedet

Kristenien, va breudeur, setu ni dastumet evid soñjal e Pasion hag e Maro Jezuz,

Or Zalver Jezuz Krist, gwir Vab da Zoue, plijet gantañ gouzañv ha mervel evid dasprena or pehejou ha digeri deom dor ar Baradoz.

Re aliez, ne daolom ket evez awalh ouz ar Mister braz-se, Mister ar Zilvidigez.

Sant Paol a lavar deom: gand gwad eun Doue om bet prenet, gand gwad eun Doue ez om bet salvet.

Lezom eta ar pezh a lavar deom an Aviel da vond don en or halonou ha da rei deom nerz-kalon da drei kein d'ar pehed.

PEDOM !

Salver Jezuz,
douget ho-peus ar groaz.
Piou all nemedoh a hellfe lavared
eo skañv samm ar vuez ?

D'ar re oll a zo gwasket,
hag ivez d'ar re a zo re ebad o buez,
roit nerz ha karantez.

Grit deom beza evezieg
ouz ar re a houzañv poan,
war o hent ar groaz :
ar glañvourien, ar brizonidi, an divroidi,
ar re 'zo dilezet ha disprizet.

Deskit deom
gweled ho kroaz,
e peb-hini euz or hroaziou,
C'hwil hag a zo beo a-viskoaz da virviken.

AMEN !

JEZUZ A BICN da Jeruzalem hag a houzañv e angoni.

Eur vouez: O hortoz eur Zalver edo an dud,
ar Yuzevien a hortoz e ar Mesiaz, Kannad ar Frankiz,
a gasfe er miz an estrañjourien (divroidi) o rén war ar vro,
a zigasfe endro ar peoh,
hag a vefe eur roue just.
Ha setu ma tigouez eun dén, e ano Jezuz: Salver !
Lavared a ra eo Eñ ar Mesiaz, an hini a dlee dond,
Kannad Doue...
Hag an dén -se a zo gantañ, evid e ziskibien,
komzou souezuz, diêz da gompren.

Lenner II Oh ober hent edont etrezeg Jeruzalem
ha Jezuz a oa ganto.
Souez ha spont a oa kroget enno.
Ar re a zeue d'o heul o-doa aon.
Jezuz a halvas an daouzeg hag a lavaras dezo:

Lenner I Pignom beteg Jeruzalem!
Réd eo e vefe lakeet Mab-an-dén etre daouarn
Prinsed ar Veleien ha doktored al Lezenn.
Ar re-mañ a gondaono anezañ d'ar maro
hag hen lakay etre daouarn an diavêzidi.
Goap a raint anezañ,
krañchal a raint ouz e vizaj,
skei a raint gantañ hag e laza.
Med dazorhi a ray a-benn tri devez.

(sioul eur pennad)

- Ar rener** Evel-se eta kemennet eo bet deom;
gouzoud a reom petra 'zo da zigouezoud.
- Lenner I** An Ebestel ne gomprenont ket
ez afe Jezuz dineh en arbenn da gasoni an dud,
en arbenn d'eur gerseen, en arbenn d'ar maro.
- Lenner II** Ni a zo heñvel outo.
Ni a zo prest awalh da stourm,
evid ar peoh, ar justis, ar frankiz.
Ni a zo prest awalh da labourad,
evid digas gwellaenn ar béd,
evid renta ar vuez dizammoh,
lakaad karantez etre an dud...
- Ar rener** Med n'eo ket êz kaoud enebiez, kasoni,
beza gwallgaset... ar maro...
Réd eo e vefe lakeet Mab-an-dén etre daouarn e enebourien.
- Ar heur** Va buez, n'hell dén he dilam diganin;
me eo hen ro. (bis)
AN OGRAOU
an oll:
Va buez, n'hell dén he dilam diganin;
me eo hen ro,
evid dasprena an oll dud, va breudeur.
- Ar rener** Va buez, n'hell dén he dilam, me eo hen ro,
komzou hag a anavezom mad.
Med o lakaad en or buez a zo un abadenn all!
Va buez, plijoud a ra din, stag mad on outi.
- Lenner I** Va amzer da zond, va fennadou amzer vag,
an dineh ma 'z on, e peb doare,
va yehed, an diduamañchou a blij din...
- Lenner II** Va zi, va bugale,
va gwetur, va zulvezioù,
va arhant lakeet war gampi...
- Ar rener** Ha c'hwi, Salver Jezuz, hag a lavare:
-(Al) laboused (euz) an heñv o-deus neizioù,
Mab-an-dén n'e-neus netra evid harpa e benn...
- Ar heur** Va buez, n'hell dén he dilam diganin,
me eo hen ro. (evel uhellogh)
- Lenner I** Rei ~~ar~~ ^{er} vuez... gouzoud a reom beteg peleh ez a:
ne vim mui dizoursi;
echu eo gand beza distrob a beb enkrez.
- Lenner II** Kared an nesa... gouzoud a reom beteg peleh ez a:
en em rei evitañ,
beza goapeet, ~~dispennet~~ ^{dispennet} ar brud ~~dispennet~~,
kaoud naon ha sehed, beza gwall-gaset,
beza kondaonet d'ar maro...
- Ar rener** Med, o rei ho puez, eleh he mired,
ho-peus kavet dorn nerzuz an Aotrou Doue
oh adsevel ahanoh d'ar vuez.

Or zalvet ho-peus;
diframmet om bet ganeoh ahanom on-unan,
distaget diouzh or buez ebad.
Desket ho-peus deom rei or buez, ni ivez.

Ar heur Va buez, n'hell dén he dilam diganin,
me eo hen ro.

(evel uhellouh)

Eur vouez Komprenom bremañ Jezuz da zerhent e varo,
e liorz Jetsemani.
Setu m'ema e-unan penn...

Ar rener D'êz eo en on amzer beza an-unan.
Kaset ha digaset gand lusk al labour hag ar studi,
sachet gand réd an dud er hêriou,
beuzet en eur mor a geleier a beb seurt.
Kazetennou, radio, television.
Beza an unan... eun dra ha n'eus ket anezañ evidom.

Ha koulskoude setu eun dén e-unan penn...
e-unan dirag e blanedenn...
e-unan dirag al labour fiziet ennañ...
e-unan penn, en noz, an noz a zo e hini...

Lenner I N'ho-peus ket gellet beilla eun eur ganin.
(sioul eur pennad)

Beza an-unan, evel Jezuz en e Basion,
gwir eo kement-se ivez evid lod ahanom.
Selaouit kentoh!

Testeniou 1. Klav on, n'hellan mond e tu ebed, bloaveziou a zo.

N'emaon ket va-unan, ma karit:
soursiet e vez ahanon, intentet e vez ouzin,
tud a zo war va zro. Med me!
hir eo an amzer, hir an noz;
n'hell dén gouzañv va foan em flas,
va-unan-penn emañ ganti.

2. Kemeret am-eus karg evid sikour va breudeur,
war dachenn ar vicher, o zikour da zevel o hein.
Hag abaoe e vezan aliez er reuntonn diouz an noz.
Va gwreg a vez aliez heñ-unan er gêr,
lod euz va mignoned ne intentont ket
perag e kemeran kement a breder.
Aliez e vezan evel va unan... sammet.

3. Pa zeu an oad, ar retred, setu goullo ar vuez,
evel ma vefe chomet a-zav.
N'e-neus mui ezomm ahanom;
or bugale o-unan a zo dizeblant en or heñver.
Hir e kavom an amzer;
or mignoned a ya da anaon an eil warlerh egile.
Hag e chomom muih-mui on-unan.

Ar beleg (eun nebeudig komzou evid kloza al lodenn-mañ)

Jezuz a zo en e angoni beteg fin ar bed,
dilezet gand e vignoned en em roet da gousked,
leun a spont hag a enkreiz...
Kemer a ra ar zamm euz or poaniou,
rei a ra priz dezo ha galloud.
"Nann, n'eo ket ar pezh a c'hoantaan,
med ar pezh a c'hoantait, Aotrou."

T E E O A N D E N - S E !

eur vouez

Setu amañ, bremañ, eun danevell e teir daolenn:
e-kreiz, e kavom Pèr.
Anaoud mad a reom anezañ,
anaoud a reom e istor, on istor deom-ni...

TAOLENN GENTA

Jezuz a zo ouz taol gand e ebestel; lavared a ra dezo:
- En noz-mañ, abalamour din, e teuoh da fallgaloni
ha d'am dilezel!

lenner I

- Aotrou, evidon-me, n'ho tilezin ket!

eur vouez

EIL TAOLENN

Jezuz a zo taolet an dorn warnañ ha kaset da di ar beleg-meur.
Pèr a zo eet da heul, a-bell.
Eur vatez a lavar dezañ:
- Evidout-te, te 'zo unan euz ar re a oa gand Jezuz a Nazared.

lenner I

- Me ? Ne anavezañ ket zoken an dén-se!

eur vouez

TREDE TAOLENN

Goude an dazorhidigez,
an diskibien a zo o pesketa.
Jezuz en em ziskouez dezo:
- Pèr, ha kared a rez ahanon ?

lenner I

- Aotrou, gouzoud a rit em-eus karantez evidoh!

ar rener

Istor Pèr a zo on istor deom-ni.
Bolontez vad a zo, da werza, a-benn-herr ez a.
Goude-ze, bet dezañ re a fiziañs ennañ e-unan, e nah e vestr.
Touellet eo da zilezel: n'oa ket gwelloc'h eged ar re all.
Med ar Hrist a zibab dres,
tud deuet da anaoud o zempladurez,
evid ma paro sklêr enno nerz Doue...
Ouz skéd sell Jezuz,
peb tra a zeu da veza sklêr.

testeniou

1. Ya, me eo an dén-se, paotr yaouank ugent vloaz.
Edon war-nez lezel peb tra a-gostez: pedennou, feiz,
sakramañchou, traoù hag a gaven enoeuz ha didalvez.
Perag klask sikour ar re all diwar o houst ?
Ne gavan war va hent nemed tud dizeblant.
An Aotrou Krist, gand e zell o para warnon,
e-neus roet din da gompren e kontañ re warnon va-unan.
E garantez a zo talvoudusoh eged peb tra all.
2. Ya, me eo an dén-se, me tad a familh.
Istor Pèr a ro din levenez ha fiziañs.
Gant va gwreg, e klaskom, on-daou, beva hervez an Aviel,
en on amzer, war dachenn or micher,
war dachenn on darempredou,

WAR AN doare da ziorren or bugale.
Chom fidel d'or Zalver n'eo ket êz,
dibaba hent an dever ha mond gantañ;
awechou e teu deom beza gwan ha tenna a-dreñv.

Med gouzoud a reom e kont muioh ar Hrist war ar re baour
eged war ar re hallouduz;
gouzoud a reom e teu dezañ dibaba ar pezh aizo dister
evid trehi war an nerz.

3. Ya, me eo hennez, me eur beleg.

An dud a hortoz diouzin ma vefen dalhmad prest d'o zelaou,
da gemer perz er péz a ro dezo joa, soursi pe enkrez.
Gortoz a reont diouzin ma rofen dezo Komz Doue.
Siwaz! Awechou n'e gavont ket ennon ar péz a glaskont
hag ez on mennet da fallgaloni evel Pèr.

Med evel Pèr, karantez an Aotrou Krist a zo va nerz.

ar beleg (evid kloza, digas da zoñj euz komzou Sant Paol (I Kor. I/27))

- Ar péz a zo diskiant er béd...

- Ar péz a zo gwan...

- Ar péz a zo izel er béd...

- Ar péz a vez disprizet...

- Setu ar péz a vez dibabet gand Doue,

KAN

E U Z A R M A R O D' A R V U E Z

ar vouez Digouezet el leh anvet ar "Hlopenn",
e stagjont anezañ ouz ar groaz,
ha da heul, daou dorfedour:
unan a-zehou, egile a-gleiz.
N'eo ket dianav deom ar péz a dremenas, en deiz-se!
deveziou a zo en ar buez,
e teu da wir kement-se evidom.

- Tro ha tro e teu deom beza ar Hrist staget ouz ar groaz,
pe al laer mad pe al laer fall,
pe ar zoudarded o lodenna etrezo dillad
an dén just o vervel.

- Tro ha tro, an dén disprizet ha gwall-gaset
pe an hini a gri: "Sehed am-eus!"

- Tro ha tro an dud o tond da weled ha d'ober goap
pe ar hantener o tiskleria e feiz.

ar rener

En deiz-se, d'ar hreisteiz, en eun taol kont,
e kouezas an noz war an douar, beteg teir eur.
War ar grehenn, ouz ar groaz, etre daou laer,
eun dén a zo o vervel.

Deuet eo an eur,

Mab-an-dén a zo o vond da antreal en e hloar.

Ya, hen lavared a ran:

- Ma ne gouez ket ar hreunenn winiz en douar
ha ma ne varv ket,
e chom e-unan;

med,ma varv,e roio eun eost puill.
 An neb a gar e vuez a gollo anezi;
 an neb n'eo evitañ e vuez er béd-mañ,
 nemed nebeud a dra,
 a gavo anezi endro er vuez peurbaduz.

ar rener Neuze,o tistaga eur griadenn vraz,Jezuz a lavaras:

lenner I - Tad,etre ho taouarn,e lakan va spered.

(sioul eur pennad)

ar rener Eñ e oa,an hini a dlee rei e frankiz d'ar bobl
 ha setu m'eo maro,marvet war eur groaz!
 Gwir eo e-noa lavaret:

ar heur - Ma - ne varv ket - ar hreunenn - heh-unan e chomo.

(distaga ferez)
 (seander)

lenner I Kaled eo ar homzou-se,piou a hell o hleved ?
 Greet om evid ar vuez,evid an heol benniget,
 evid an dañsou hag ar bokedou.

ar heur Ma - ne varv ket - ar hreunenn - heh-unan e chomo.

(ar moueziou a zempla evid echui)

lenner II Kaled eo ar homzou-se,med o hleved a rankom.
 Diwanet om euz an douar:
 hadenn,plantenn,boked digor
 ha goude e teu evidom amzer an eost.

ar heur Ma - ne varv ket - ar hreunenn - heh-unan e chomo.

ar rener Evid beva eo red mervel ,
 ar hreunenn a rank mervel evid kellida en douar,
 ar hreunenn a rank mervel evid dougen frouez.

lenner I Pa zelaouan va breur e-leh komz ahanon va-unan,
 pa roan lod d'am breur,
 e-leh derhel evidon kement am-eus.

ar heur Mervel a ran/ha frouez - a zougan.

lenner I Ez eo beva dizoursi,e peoh...
 Pa houzañvom a galon vad beza direnket,
 kemer trubuill evid ar re all...

ar heur Mervel a ran - ha frouez - a zougan.

lenner I Pa vezan tamallet e gaou,
 pa droan va chod all,
 e-leh skei d'am zro...

ar heur Mervel a ran - ha frouez - a zougan.

(ar moueziou a zempla evid echui)

eur vouez Jezuz Krist a oa Doue,
 ha koulskoude n'eo ket fellet dezañ
 delher groñs d'ar renk a lak anezañ par da Zoue.
 Er hontrol,diskennet eo ken izel ha netra,
 kemeret gantañ ar stad a sklavour,
 deuet da veza heñvel ouz an dud,
 e peb doare.
 Hag anavezet diouz e zoare evel eun dén etouez ar re all.

En em izelleet e-neus ha sentuz eo bet beteg ar maro,
ar maro war ar groaz zoken.
Ablamour da ze, e-neus Doue save t'anezañ d'an uhella,
ha roet dezañ an ano a zo dreist peb ano.

(Filip 2/6-9)

KAN (Breiz a gan N°5)

Euz ar bez, beo on savet
ha ganeoh e vezin bepred.

pe

kantik hent ar groaz (koublad diweza)

Setu bremañ e gorr maro
sebeliet, douget d'ar bez.
Med d'an trede deiz, ahano,
e savo leun a vuez.
Va horv-me ivez a ranko
mond hebdale d'an douar.
O va Jezuz, grit ma savo,
eun deiz d'an Neñv, leun a hloar.

lenner I

Doue e-neus roet dezañ al levenez a zo dreist peb levenez,
al levenez da lodenna gand ar re all,
al levenez da veza laouen gand an oll,
heb gortoz netra en distro.

lenner II

Al levenez da veza hegarad ha da gaoud kalon vad,
al levenez da rei ha d'en em rei heb konta

KAN

Euz ar bed, beo on savet,
ha ganeoh e chomin bepred. Alleluia !

pe

Setu bremañ e gorr maro
sebeliet, douget d'ar bez.
Med d'an trede deiz, ahano,
e savo leun a vuez.
Va horv-me ivez a ranko
mond hebdale d'an douar.
O va Jezuz, grit ma savo,
eun deiz d'an Neñv, leun a hloar !

lenner I

Doue e-neus roet dezañ ar vuez en tu all da beb maro.

lenner II

Doue e-neus dazorhet anezañ.

eur vouez

Evid ma teuy ar bed a-bez,
o kleved Anô Jezuz,
da goueza d'an daoulin
ha ma kano an oll boblou:

AN AOTROU EO JEZUZ KRIST !

ar heur

AN AOTROU EO JEZUZ KRIST !

an oll

AN AOTROU EO JEZUZ KRIST !

EVID AR BLOAVEZ SANTEL

pe bloavez ar "JUBILE"

Ar re a zo deuet eun tammig war an oad, a oar e vez embannet gand on Tad Santel ar Pab eur bloavez santel beñ 25 bloaz.

Soñj o-deus er bloaveziou 1925 hag 1950 hag etre daou ar bloavez 1933: Naontegved kantved on Dasprenadur(I).

1975 a vo adarre eur bloavez a hrasou evid ar re a hello mond da bardona, n'eus forz peseurt devez, a-hed ar bloaz, en ilizou merket gand an Aotrou 'n Eskob: an diou iliz-veur Kemper ha Kastell-Paol, ilizou ar Folgoad, Rummengol hag Abati Landevenneg; ouspenn, netra nemed d'ar pardon braz, e ilizou I.V. Kernitron, I.V. ar Salet, I.V. Penhors, I.V. Kerzevot, I.V. ar Porzou, Santez-Anna ar Palud. Ouspenn, da geñver pardon ar re glañv, ha da geñver an daou belerinaj e Lourd, e miz gouere hag e miz gwengolo.

Ar péz a gont, hag ar péz a c'hoanta On Tad Santel ar Pab eo e vefem aketusoh da bedi, da zoñjal e karantez Doue evid an dud, e fallagriez ar pehed, er red m'eo deom cheñch buez, mond euz a fall da vad hag euz a vad da welloh; maga ivez en or halon eur garantez vraz evid Doue hag evid an nesa, ha poania da vevañ e peñh gand an oll ha da lakaad unvaniez etre an dud e peb keñver, daoust da gement a zeu da lakaad freuz ha reuz etrezo; moug e halonou peb kasoni ha peb gwarezi.

(I) Rédemption

P E D E N N e v i d A R B L O A V E Z S A N T E L

Aotrou Doue, Tad an dud ha ken karantezuz en o heñver,
 plijet ganeoh ober ar peoh gand an oll dud,
 en ho Mab Jezuz Krist, Maro hag Adsavet da Veo,
 en eur lakaad evelse peoh hag emgleo etre an oll dud;
 selaouit pedenn ho pugale er bloavez-mañ a hras hag a zilvidigez.

Ra zeuy ho Spered a Vuez hag a zantelez da renevezi ahanom,
 betek goueled or halon,
 o tond da unani ahanom evid or buez penn-da-benn,
 gand an Aotrou Krist, Adsavet a Varo da Veo, or Zalver hag or Breur.

Ni hag a gerz a-unan gand an oll gristenien war hent an Aviel,
 ra vo roet deom, en eur jom fidel da gelennadurez an Iliz
 ha troet da gacud soursi gand ezommou or breudeur,
 poania da gas atao war araog an emgleo, an unvaniez hag ar peoh.

Ar boan a gemer ar re a labour e servij an dud, ~~grit dezo taoler~~
 grit dezo taoler frouez puill.
 Bezit esperañs ha sklerijenn ar re a zo ouz ho klask heb hoh anaoud,
 ha sklerijenn ar re hoh anavez hag a glask atao hoh anaoud gwelloc'h.

Roit deom ar pardon euz hor pehejou, grit d'or feiz startaad,
 d'on esperañs ^{gwelloc'h} (mond war well) ha d'or harantez ^{kreder} (mond war gresk);
 grit deom beva evel bugale garet deoh,
 en eur gerzed war roudou Jezuz.

Grit ma teuy hoh Iliz, gand sikour ar Werhez Vari, Mamm an Iliz,
 da veza sin ha sakramant a zilvidigez evid an oll dud,
 ha ma kreda evel-se ar bed en ho karantez hag en ho kwirionez.

Tad leun a vadelez, selaouit ar bedenn
 a ra deom ober ar Spered Santel, evid ho kloar hag or zilvidigez,
 dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 a zo evid peb-hini an hent, ar Wirionez hag ar Vuez,
 a-hed an oll gantvejou.

Amen!

OVERENN ar BLOAVEZ SANTEL

(overenn an unani)

Eun overenn a zo bet savet hag aotreet evid bloavez ar Jubile.
Embann a reom anezi e brezoneg.

LID AR BINIJENN

Aotrou Jezuz Krist deuet d'ober ar peoh
etre an dud hag ho Tad, a zo ivez ion Tad,
meuleudi deoh ! Ho pet truez ouzom !

Ho pet truez ouzom !

C'hwil ar zervicher fidel,
deuet da veza pehed er bed-mañ,
evid ma vim ni lakeet just ennoh,
meuleudi deoh ! Ho pet truez ouzom !

Ho pet truez ouzom !

C'hwil hag a vev e-kichen ho Tad,
hag a zach ahanom warzu ennañ,
en unaniez ar Spered Santel,
meuleudi deoh ! Ho pet truez ouzom !

Ho pet truez ouzom !

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, lib ha santel,
felloud a ra deoh ober euz famill vraz mab-den
eur boblad tud lib ha ne vent sklavour a netra,
nag anezo o-unan, nag euz ar re all,
nag euz al labour, nag euz an arhant,
nag euz ar pehed, nag euz ar maro;

Peogwir e kinnigit d'hoz iliz eur bloavez a hras hag a vennoz,
grit dezil tizoud d'eur lib brenteiz vrasoh,
ma vezo eur zil skleroh euz ho karantez evid ar béd.

Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

pe

Aotrou Doue, c'hwil hag a oar gortoz ha pardoni,
rei a rit d'an dud amzeriou a hras,
evid ma teuint da anaoud ennoh, Krouer ha Frankizer an oll.
Sikourit ahanom da denna or mad
euz an amzer frouezuz-mañ.
Grit deom selaou ho Komz a beoh ouz or golver,
ha beza evel-se e servij ar c'hoant ho-peus
da unani peb tra en Aotrou Krist,
Eñ, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

LENNADENNOU a heller dibab evid overenn ar bloavez santel.

Or zoñjou deom a vez aliez disheñvel diouz soñjou an Aotrou Doue,
med Eñ a wel pellho^hegedom. Deom da veza war evez euz ar pezh a lavar.

LENNADENN EUZ LEVE AR PROFED IZAIAS (55/6-II)

6. Bezit war glask euz an Aotrou endra ma vez tu d'e gavoud;
en em erbedit outañ, e-keid ha m'ema tost deoh.
7. Ra droio an den fall diwar e hent,
hag an den fallakr diwar e vennozdou;
ra zistroio da gavoud an Aotrou, e-no truez outañ,
da gavoud on Doue, rag mad eo da bardoni.
8. Rag ho soñjou n'int ket va zoñjou,
ha va heñchou din n'int ket ho heñchou, eme an Aotrou.
9. Kement ha m'ema uhel an neñv a-uz d'an douar,
evel-se ema va heñchou a-uz d'ho re,
ha va mennoziou a-uz d'ho mennoziou.
10. Ar glao hag an erh a ziskenn euz an neñvou,
ha ne zistroont ket heb beza lakeet ar greun da gellida,
evid rei had d'an hader, ha bara d'an neb a zebr.
11. Evel-se ema kont gand ar gomz a zeu euz va ginou:
ne zistro ket davedon, evel diwar aner,
heb beza greet ar pezh a felle din,
ha kaset da benn ar pezh am-boa karget anezi da ober.

Doue e-neus greet emgleo gand an dud, hag an dud a zeu da derri an emgleo-se
dre ar pehed. Med Doue a zo madelezuz; or gelver a ra d'en em glevet a-nevez
gantañ.

LENNADENN EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (5/17-31)

17. An neb a zo en Aotrou Krist a zo anezañ eur hrouadur nevez,
an traou a-wechall a zo eet e-biou, setu deuet eur bed nevez.
18. Kement-se oll a zeu euz Doue an Tad,
e-neus on lakeet e peoh gantañ dre an Aotrou Krist,
hag e-neus fiziet ennom ar garg da rei e bardon d'an dud.
19. Rag Doue eo a oa en Aotrou Krist o lakaad ar béd e peoh gantañ,
en eur denna diwar an dud pouez o fehejou,
pa lak war or muzellou-ni komzou ar pardon.
20. A-berz or Zalver on-eus karg da brezeg,
ha dre or mouez, Doue eo a zeu d'ho kolver.
Hoh aspedi a reom, en Ano or Zalver:
grit ho peoh gand Doue.
21. Eñ, ha ne ouie ket petra eo pehi,
e-neus Doue grêt anezañ pehed ablamour deom,
evid ma teufem-ni da gaoud santelez Doue drezañ.

SALM 50 - Miserere (3-4,5-6a,I2-I3,I4,I7)

3. Truez ouzin, va Doue, ablamour d'ho madelez,
en ho trugarez vraz, lamit va mañkou en ho keñver.

4. Va gwalhit penn-da-benn euz an droug am-eus grêt;
goude va fehed, grit ahanon glan adarre.

oooooooo

5. Ya, añzao a ran ~~gwalhit~~ ^{am-eus} manket en ho keñver;
noz-deiz ema va fehed dirazon.

6. Eneb deoh, ha deoh hebken, am-eus pehet,
ar pezh a zo fall dirazoh am-eus grêt.

oooooooo

12. Krouit ennon, va Doue, eur galon c'hlan,
lakit em hreiz eur volontez stard,

13. mirit na dehfen mui pell diouzoh,
ha na dennit ket diganin ho Spered a zantelez.

oooooooo

14. Renit din ar joa da veza salvet ganeoh,
roit din kalon vad d'am harpa nerzuz.

17. Aotrou Doue, digorit din va muzellou,
ma savin va mouez evid ho meuli.

oooooooo

AVIEL - Doue a zo eun tad a zalh e garantez d'an dud fidel,
hag a ro ar pardon d'ar peher.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (I5/I-3, II-32)

1. En amzer-se, ar publikaned hag ar beherien a veze oll,
o klask mond tost da Jezuz evid e zelaou.

2. Ar farizianed hag ar skriped a hrozmole, en eur lavared:
- Hennez a ra digemer vad d'ar beherien hag a zebr ganto.
Jezuz neuze, a lavar dezo ar barabolenn-mañ:

11. Eun den e-noa daou vab: Ar yaouanka a lavar d'e dad:
- Tad, roit din ar pezh a dle dond din d'am lod!
Hag an tad a ro e lod da beñhini.

13. Eun nebeud devezioù goude, dastumet gantañ e oll beadra,
ar mab yaouanka a gerz d'eur vro bel, diouz ar gêr,
hag eno e tispign e zañvez o vevad en dizurz.

14. Goude m'e-noa foranet kement e-noa,
e teuas eur gernez vraz er vro,
hag en ivez a gouezas en dienez,

15. hag e rankas mond da vevel gand eun aotrou euz ar vro,
hag hemañ a gasas anezañ war ar mêz da vesa ar moh.

16. C'hoant awalh e-neveze da leunia e gov
gand ar hlosou a zebre ar moh,
med den ebéd ne roe dezañ.

17. Neuze e soñj ennañ e-unan: nag a vevelien e ti va zad
o-deus bara d'o gwalh, ha me amañ o vervel gand an naon!

18. Dao eo din sevel ha mond da di va zad,
hag e lavar in dezañ:
- Tad, pehed am-eus eneb an neñv hag eneb deoh.
19. N'on ket din mui da veza anvet ho mab,
kemerit ahanon evel unan euz ho mevelien.
20. Hag eñ sevel ha mond daved e dad.
Pell edo c'hoaz, pa welas e dad anezañ.
Piket e galon gand an druez, an tad a ziredas
da vriata e vab ha da boka dezañ.
21. Ar mab neuze:- Tad, pehet am-eus eneb an neñv hag eneb deoh,
n'on ket din mui da veza anvet ho mab.
22. Hag an tad a lavare d'e vevelien:
- Buan, it da gerhad kaerra dillad a zo da lakaad dezañ,
gand eur walenn war e viz, ha boutou en e dreid.
23. Digasit al leue lard ha lazit anezañ,
debrom ha greom fest a joa,
24. rag va mab amañ a oa maro hag ez eo deuet beo en-dro,
kollet e oa, ha setu m'eo kavet.
Kregi a reont eta da ober fest.
- (amañ eh echu al lennadenn verr)
25. Ar mab hēna, evid-se, a oa er park.
En eur zond d'ar gêr, dre ma tosta ouz an ti,
e klev trouz soniou ha dañsou.
26. Gelter a ra unan euz ar vevelien,
hag e houlenn outañ petra 'zo a nevez.
27. - Ho preur, eme ar mevel, a zo erruet,
hag ho tad e-neus laket laza al leue lard,
o veza m'e-neus e gavet en-dro yah ha dibistig.
28. E kounnar ruz ez eas ar mab hēna
ha ne felle ket dezañ mond tre.
Rankoud a reas e dad mond er mêz, da bourchu warnañ.
29. Med eñ a respont d'e dad:
- Setu nousped vloaz emañ en ho servij,
heb dizenti ouzoh morse, ^{diñ}
ha gwech ebéd n'ho-peus roet eur havrig,
evid ober fest gand va mignoned.
30. Med, kerkent ha m'eo deuet en-dro da vab all-mañ,
debret gantañ ho tañvez gand merhed fall,
ho-peus lazet evitañ al leue lard.
31. An tad a lavar dezañ:
- Va mab, te a zo dalhmad ganin,
ha kement tra am-eus a zo dit.
32. Med réd e oa ober fest ha beza laouen,
peogwir da vreur a oa maro hag ez eo deuet beo en-dro,
kollet e oa, hag ez eo kavet.

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, o tigas or provou war an zoter,
 e teuom d'ho pedi da zieubi or halonou,
 euz peb roudenn a gasoni pe a warizi,
 evid ma hellfem, unanet da genta gand or breudeur,
 kinnig deoh gand eur galon eeun,
 ar Zakrifiz a ra deom beza unanet ganeoh.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

Amen!

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, grit deom kavoud er Gomunion-mañ,
 an nerz on-eus ezomm anezañ
 evid poania heb ehan da astenn peoh an Aotrou Krist.

Eñ, Doue beo ganeoh, ha gand ar Spered Glan,
 a oll-viskoaz da virviken.

Amen!

BENNOZ SOLANEL AR BELEG (diwar II Cor.5/I^o)

Va breudeur,
 peb tra a zeu euz a Zoue,
 e-neus on lakeet e peoh gantañ, dre an Aotrou Krist,
 hag e-neus fiziet ennom ar garg da rei ar pardon d'an dud.
 Dezañ da skuill warnoh, brokuz, e vennoz
 a-hed ar bloaz-mañ a hras.

Amen!

- En ano an Aotrou Krist,
 lezit ar peoh gand Doue da ziskenn ennoh,
 evid dond da veza justis Doue.

Amen!

En Ano an Aotrou Krist,
 na lezit ket da vond da goll ar hras resevet digand Doue,
 rag setu an amzer talvouduz evid distrei davetañ. Amen!

- En Ano an Aotrou Krist,
 na jomit ket prizonidi ahanoh hoh-unan,
 med digorit frank ho kalon.

Amen!

- Ha Doue oll-halloudeg d'ho penniga,
 an Tad,
 ar Mab,
 hag ar Spered Santel.

Amen!

S A K R A M A N T A N N O U E N N

Setu amañ da genta mouez an Iliz evid rei deom da intent gwelloh perag e vez roet Sakramant an Nouenn d'ar re glañv pe d'ar re goz.

Diskleriadur Sened-Meur Vatikan II

War an Iliz N° 8

" Or Zalver a zo bet kaset gand an Tad "evid kas ar helou mad d'ar beorien,"parea ar halonou doaniet"(Luk.19/10):evel-se,e tis-kouez an Ilizhe harantez vraz evid ar re oll a zo sammet gand ar zem-pladurez a sko mab-dén;gwelloh c'hoaz:anaoud a ra en tud paour hag en dud gwasket skeudenn an Hini e-neus diazezet,eñ e-unan paour ha gwasket;klask a ra euz he gwella,o zikour en o dienez;ouz o zervicha eo ar Hrist e-unan eo a fell dezi zervicha."

N° II

Dre Zakramant an Nouenn roet d'ar re glañv,ha dre bedenn ar veleien,an Iliz a-bez eo a zeu da erbedi ar re glañv d'an Aotrou Doue o houzañv poan ha savet d'ar hloar,evid biannaad o foanlou hag o zavetei (diwar Sant Jakez 5/14-16);gwelloh c'hoaz:alia a ra anezo d' en em unani a galon vad gand Pasion ha Maro an Aotrou Krist (diwar Rom 8/17) ;Koloz 1/24 ;II Tim.2/11-12 ;I Pèr 4/13)ha da zigas o lod evid mad Pobl Doue".

Diskleriadur war al Liderez

N° 73

" Sakramant an Nouenn,anvet ivez ha gwelloh "Oleadur ar re glañv " n'eo ket hebken sakramant ar re a zo war-nez mervel.Setu perag ar mare mad d'e reseo a vez deuet,heb douetañs,pa gomañs ar hlañvour da veza riskl dezañ da vervel,o vez m'eo eet d'inerz pe oajet."

EVID DIGERI

Tenna da genta evez an dud gand eun nebeud komzou evelhenn pe a-hend-all:

- Pa zeuas Jezuz ,savet a varo da veo,da rei d'e ziskibien an urz da embann kelou mad ar Zilvidigez dre ar bed a-bez,e lavaras dezo astenn o daouarn war re glañv.

Gand e Abostol Sant Jakez,e-neus roet deom lid an eoul-sakr emaoñ o vond da reseo:

" Klañv eo unan bennag ahanoh ?
Ra halvo beleien an Iliz.D'ar re-mañ pedi evitañ hag olevi anezañ gand eoul en Ano an Aotrou.Pedenn ar feiz a zalvo an hin'klañv hag hen adsavo ha m'e-neus greet pehejou e vezint pardonet dezañ."(Jak.5/14-15)

Pedom eta an Aotrou Doue da rei da N...(pe d'ar re a zo o vond da re-
zeo Sakramant ar re glañv) ha deom-ni oll amañ grasou ar zakramant.

Ni ho péd, Salver er béd, da zizamma euz e boaniou, dre hras ar Spered
Santel, an dén klañv a zo amañ.

Roit dezañ ar pardon euz e behejou. Pellait dioutañ kement a vefe penn-
kaoz a boan evid e gorv hag evid e ene.

En ho trugarez, roit dezañ adarre yehed e gorv hag e ene.

Roit dezañ ar pare ma hello adarre ober e labour.

C'hwi hag a ren gand an Tad hag ar Spered Santel, bremañ ha da viken.

Amen !

Ma vez meur a hini da zakramanti

Ni ho péd, Salver ar béd, da zizamma euz o foaniou, dre hras ar Spered
Santel, an dud klañv pe goz a zo amañ.

Roit dezo ar pardon euz o fehejou.

Pellait diouto kement a vefe penn-kaoz a boan evid o horv hag evid o
ene. En ho trugarez, roit dezo adarre yehed o horv hag o ene.

Roit dezo ar pare ma hellint adarre ober o labour.

C'hwi hag a vev hag a ren gand an Tad hag ar Spered Santel,
bremañ ha da viken.

Amen!

L I D ar G O M Z

Bez e heller lakaad da ziwan ha da greski ar zantimañchou a feiz hag
a esperañs e kalon ar hlañvour hag an dud a zo endro dezañ, gand lennadenou,
berr pe hirroh hervez stad an hini klañv, (gweled pelloh eun dibab a lenna-
denou) gand pedennou anavezet mad evel "Me gred e Doue", "Me govez ouz Doue",
an aktou a feiz, a esperañs hag a garantez. Pe c'hoaz en eur gana eur hantik
bennag.

Gand kristenien vad e heller renevezi promesaou ar Vadiziant, evel amañ
warlerh:

Araog reseo ar Zakramant, emaoñ o vond da ziskleria ho Feiz, gand eur
fiziañs vraz e madelez Doue.

- Ha kredi a rit e Doue, an Tad oll-halloudeg, Krouer an Neñv hag an
douar ?

- YA, ME A GRED ! pe YA, NI A GRED !

- Ha kredi a rit e Jezuz Krist, e Vab Unganet, or Zalver, ganet gand
ar Werhez Vari, e-neus gouzañvet e Basion, a zo bet sebeliet, a zo Adsavet
euz a douez ar re varo hag a zo azezet en tu dehou d'an Tad ?

- YA, ME (NI) A GRED :

- Ha kredi a rit er Spered Santel, en Iliz Santel, Katolik, e Komunion
ar Zent, er pardon euz ar pehejou, e Dazorn ar horvou, hag er Vuez peurbaduz ?

- YA, ME (NI) A GRED

PEDOM ! Plijet gand Doue oll-halloudeg, Tad or Zalver Jezuz Krist,
e-neus greet deom beza ganet a-nevez dre an Dour hag ar
Spered Santel,
hag e-neus roet deom ar Pardon euz an oll behejou,
or mired c'hoaz, dre e hras en Aotrou Krist, or Zalver,
evid ar Vuez peurbaduz.

Amen!

Gand beleien pe leanezed e vefe mad digas da zoñj dezo euz an deiz m'o-dous
en em ouestlet da Zoue, evid servicha an Iliz hag ar bed.

L I D ar Z A K R A M A N T

an daouarn astennet

Ma vez meur a veleg o lida ar zakramant asamblez ez eont endro d'an hini a zo o ren al lidou hag eh astennont o daouarn troet warzu ar re glañv. Ar rener hag eñ hebken a lavar ar bedenn-mañ:

Dre va (pe: ON) daouarn astennet,
dre zikour pedennou ar Werhez Vari,
Sant Jozef hag an oll Zent,
ra vo dieubet ho puez
euz peb galloud an Droug-Spered.

En Ano an Tad, hag ar Mab hag ar Spered Santel.

an oll a respont: AMEN!

an oleadur

Peb beleg a reseo eur podig eoul-sakr. Unan a zigas da zoñj eo bet benniget an eoul gand an Aotrou 'n Eskob dre ar bedenn-mañ d'ar Yaou-gam-lid:

Ra zeuio an eoul-mañ, evid an neb a resevo al louzou divin-mañ, da veza eur frealzidigez evid e gorv hag evid e ene,
ma likaso kuit dioutañ peb poan, peb kleñved, peb droug en e gorv ha peb anken en e spered.

Ar bedenn-ze, greet gand an Aotrou 'n Eskob, a zo ivez eul lodenn euz ar Zakramant. Ar veleien a ya daved ar re glañv pe re goz hag a ra sin ar groaz gand an oleo sakr war dal ha war daouarn astennet ar re glañv (war an izili all ma karer), en eur lavared:

N...dre ar groaz greet gand an oleo-sakr,
ra zeuio an Aotrou da ziskouez dit (pe: deoh) e vadelez
ha da rei dit (pe: deoh)
ar pardon euz da behejou (pe: ho pehejou).

ar hlañvour a respont: AMEN!

Epad al lidou-se, e vo gellet kana, ma 'z eus kalz a dud da zakramanti.

P E D E N N evid E Z O M M O U an O L Lar beleg

Va breudeur, evid trugarekaad Doue euz ar grasou bet digantañ er zakramant-mañ, digorom or halon da gement a zo, evid tud on amzer, leh a joa, a esperañs, a dristidigez pe a anken; ma hellint, unanet en Aotrou Krist, kerzed asamblez war-zu Rouantelez an Tad.

1. Evid ar re oll a gemer perz e Pasion or Zalver dre o hleñved pe dre ar garo m'eo o labour;
ma teuio Doue da rei dezo frelazidigez ha nerz-kalon...
asamblez pedom...

R/ Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

2. Evid an oll glañvourien, evid an dud deuet war an oad,
an dud mahagnet, ar vugale ampechet,
ma vo gwriziennet don en o halon hag en o buez
ar feiz, an esperañs hag ar garantez...
Asamblez pedom...

R/ Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn !

3. Evid an oll dud gwasket gand ar vuez,
ma vezint dre o zrubuillou,
evid an dud a zo endro dezo,
testou euz an Aotrou Krist hag ebestel dezañ...
ma kavint, a-berz o zud hag o amezeien digemer vad ha karantez...
Asamblez pedom...

R/ Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn !

4. Evid an re oll a labour wardro ar re glañv:
medisined, leaned, leanezed, implijidi...
Ma raio Doue dezo nerz da ober o labour,
gand pasianted ha karantez,
asamblez pedom...

R/ Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn !

5. Evid an iliz a-béz, on Tad Santel ar Pab,
an eskibien, ar veleien, al leaned ha leanezed, an oll gristenien,
ma vezint unanet gand an hevelezh karantez,
hervez an Aviel,
evid servicha ar beorien, an dud dinerz, an dud dister.
Asamblez pedom !

R/ Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn !

PEDOM !

Aotrou Doue, Mammenn ar vuez,
ho pedi a reom da zond war zikour
N... a zo ouz hoh aspedi gand fiziañs:
roït dezañ an nerz e-neus ezomm,
grit dezañ kaoud didor d'e boaniou
ha dilivrit anezañ euz peb droug.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

pe: Beillit, Aotrou Doue, war N... (an hini klañv-mañ)
ha war ar re oll a zo gwasket a-unan gantañ.
Skuillit warno ho karantez,
grit dezo lakaad ennoh o fiziañs.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

ar beleg: Unanet er memez Spered, e hellom bremañ lavared gand fiziañs
ar bedenn desket deom gand or Zalver:

On Tad hag a zo en Neñv,
hoh ano bezet santelleet;
ho Rouantelez deuet deom;
ho polontez bezet greet
war an douar evel en Neñv.
Roït deom hirio or bara pemdezieg;
pardonit deom hor pehejou,
evel ma pardonon d'ar re o-deus manket ouzom;
ha n'on lezit ket da goueza en tentadur,
met on diwallit diouz an droug.

Ar beleg - Eur bedenn e'hoaz d'ar Werhez Vari,hi hag a zo repu ar beherien ha repu ar re glañv,en he sav e-tal ar groaz.

Me ho salud,Mari,leun a hras,
an Aotrou Doue a zo ganeoh,
benniget oh dreist an oll gwragez
ha benniget ec
ar frouez euz ho korv,Jezuz.

Santez Mari,Mamm da Zoue,
pedit evidom,peherien,
bremañ hag en eur euz or maro.

Evel-se bezet greet.

Amañ e vo roet ar gomunion d'ar hlañvour ma 'z eus tro d'hen ober.

Ar beleg a gemer Korv or Zalver hag a lavar:

- Bremañ,pa 'z om pedet ouz taol or Zalver,
setu Oan Doue,
an hini a zilam pehed ar bed.
- Aotrou,n'on ket din e teufeh beteg ennon,
med lavarit eur ger hebken
hag e vin pareet.
- Korv or Zalver ! AMEN !

sioulder

Eur pennadig sioul... Ar beleg a hell lavared ar bedenn-mañ:

Ho pedi a reom,Aotrou Doue,
evid ar re ho-peus renevezet gand Korv ha Gwad ho Mab.
Grit ma hellint kaoud perz er vuez peurbaduz,
a-unan gand ar Werhez Gloruz Vari,Mamm da Zoue,
gand an Ebestel eürus hag an oll Zent euz peb amzer,
ha renta deoh da viken gloar ha meuleudi,
dre Jezuz Krist,ho Mab karet. AMEN!

Ma vez ar hlañvour dare da vervel ha digaset dezañ ar gomunion e viatik,e hell ar beleg-lavared ar bedenn-mañ:

Aotrou Doue,Tad leun a vadelez,
a zeu ahanoh peb frealzidigez,
taolit eur zell war N...or breur (or hoar - or mignon);
gwall-gaset gand ar kleñved,
e laka ennoh e fiziañs.

(Ra zeuio gras an Nouenn da skañvaad e boaniou).
Ra vo evitañ ar Gomunion e Korv ha Gwad ho Mab
eur viatik da dreuzi ar maro,
hag eun arrez euz ar Rouantelez da zond.

Dre Jezuz Krist,on Aotrou.

AMEN !

SALM 50 - Miserere (3-4,5-6a,12-13,14,17)

3. Truez ouzin, va Doue, ablamour d'ho madelez;
en ho trugarez vraz, lamit va mañkou en ho keñver.
4. Va gwalhit peñn-da-benn euz an droug am-eus greet;
goude va fehed, grit ahanon glan adarre.
5. Ya, anzañ a ran on bet manket en ho keñver;
noz-deiz, ema va fehed dirazon.
6. Eneb deoh, ha deoh hebken, am-eus pehet,
ar peñn a zo fall dirazoh am-eus greet.
12. Krouit ennon, va Doue, eur galon hlan,
lakit em hreiz eur volontez stard.
13. Mirit na dehfen mui pell diouzh,
ha na dennit ket diganin ho Spered a zantelez.
14. Rentit din ar joa da veza salvet ganeoh,
roñt din kalon vad d'am harpa nerzuz.
17. Aotrou Doue, digorit din va muzellou,
ma savin va mouez evid ho meuli.

Bennoz ar beleg evid echui:

N....ra blijo gand Doue, on Tad, ho mired en e garantez.

AMEN!

ra blijo gand e Vab, Jezuz, rei deoh konfort ha frealzidigez!

AmEN!

ra blijo gand ar Spered Santel rei deoh sklerijenn ha nerz.

AMEN!

Ha c'hwi oll a zo amañ,
Doue Oll-halloudeg d'ho penniga +
An TAD, ar MAB hag ar SPERED SANTEL,
ha d'ho mired en e beoh.

AMEN!

oooooooooooooooooooo

PEDENNOU ALL DA LAVARED DIOUZ PA VEZ TRO

1. Tad oll-halloudeg,
C'hwi hag a ro ar pare beurbaduz d'ar re a gred ennoh,
ho pedi a reom evid N....gwasket gand ar hleñved;
grit ma kavo adarre ar yehed,
ma kemero adarre e blas e-touez an dud
ha ma hello renta
deoh gloar ha meuleudi.

Dre Jezuz Krist, on Aotrou .

AMEN !

2. Salver Jezuz,
gouzañvet ho-peus ho Pasion evid silvidigez an dud;
d'al laer dehou, staget ouz ar groaz en ho kichen,
ho-peus prometet e vefe ganeoh er Baradoz;
ho pedi a reom evid N.... (an hini klanv-mañ),
e-neus kement da houzañv.
Deuit da skañvaad e boaniou,
roit dezañ sklerijenn ha peoh,
C'hwi hag a zo on Doue Beo,
gand an Tad hag ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN!

3. Aotrou, on Doue,
taolit eur zell a vadelez war N...,
sammet gand an Ioad hag ar zempladurez.
Goulennet e-neus gras sakramant an Nouenn,
evid silvidigez e gorr hag e ene.
Roit dezañ nerz ho Spered,
ma chomo stard er Feiz,
divrall en Esperañs,
ma roio evel-se d'ar re a zo endro dezañ
an testeni euz e nerz-kalon dienkreiz,
hag euz ho karantez, mammenn a levez.
Dre Jezuz, ar Hrist, on Aotrou.

AMEN!

oooooooooooooooo
oooooooooooo

INDULJANS ar MARO MAD

ar beleg o vond er gambr a lavar:

Peoh d'an ti-mañ !

R/ Ha da gement hini a zo o chom ennañ!

goudeze e ra an asperjez.

Skuillit dour warnon, Aotrou, gand ar sparf
hag e vin nêteet;
c'hwî am gwalho hag e vezin gwennoh eged an erh.

Ho-pezit truez ouzin, va Doue,
en ho trugarez hag a zo braz meurbed.

- Or zikour a zo en Ano Doue!

R/ E-neus greet an neñv hag an douar!

- Aotrou Doue, selaouit va fedenn !

R/ Ha ra zavo va mouez beteg ennoh!

- An Aotrou Doue ganeoh !

R/ Ha gand ho spered.

Pedom...

Selaouit ouzom, Aotrou Doue oll-halloudeg,
Doue Peurbadel, ha digasit hoh El santel euz an Neñv,
da ziwall, da gennerza, da warezi, da frealzi ha da zivenn
ar re oll a zo o chom amañ.

Dre Jezuz Krist, or Zalver

AMEN!

ar beleg:

- Or zikour a zo en Ano Doue!

R/ E-neus greet an neñv hag an douar!

- Disoñjit pehejou ho servicher (ho servichérez)!

Na gastizit ket anezañ (anezi) evid e behejou (he fehejou)!

Kyrie eleison ! Christe eleison ! Kyrie eleison ! Pater noster...

- Et ne nos inducas in tentationem,

R/ Sed libera nos a malo!

- Salvit ho servicher (ho servichérez)!

R/ a zo ennoh e esperañs, Aotrou!

- Aotrou, selaouit va fedenn!

R/ Ra bigno va galvadenn beteg ennoh!

- An Actrou Doue ganeoh!

R/ Ha gand ho spered!

Pedom...

Doue leun a vadelez, Tad an drugarez,
Doue a ro peb frealzidigez,
c'hwi ha n'ho-peus ket c'hoant da weled o vond da goll
hini ebed euz ar re o-deus feiz ha fiziañs ennoh;
en ho madelez vraz, sellit ouz ho servicher (ho servichérez),
e feiz stard hag e esperañs kristen
oh erbedi evitañ dirazoh.

Dre Or Zalver ho-peus digaset,
deuit davetañ (daveti)
ha dre Basion ha Maro ho Mab Unganet,
plijet ganeoh rei dezañ (dezi) an diskarg
euz e oll behejou (he oll fehejou),
ma kavo e ene ennoh
d'an eur euz ar maro,
eur Barner trugarezuz,
ha ma hello, gwalhet mad e Gwad ho Mab Unganet,
beza kavet din da vond d'ar Vuez
ha ne vo fin ebed dezi.

AMEN !

oooooooooooooooooooo

Unan bennag a lavar da heul ar hlañvour: (confiteor)

Me anzav dirag Doue oll-halloudeg
ha dirazoh, va breudeur,
am-eus pehet braz,
dre zoñj, dre gomz, dre ober ha dre jom heb ober.
Rag-se e houlennan digand ar Werhez Vari,
an Elez hag an Oll Zent,
ha diganeoh, va breudeur, pedi Doue evidon.

Ar beleg:

Plijet gand Doue oll-halloudeg kaoud truez ouzoh,
pardon deoh ho pehejou
ha kas ahanoh d'ar Vuez peurbaduz.

AMEN!

Pedom...

Jezuz Krist, on Actrou, Mab an Doue Beo,
e-neus roet d'e Abostol eüruz Sant Pêr,
ar halloud da liamma ha ziliamma.

Ra zeuio, en e drugarez vraz,
da zigemer mad ho kovesion
ha da rei deoh endro sae wenn ho Padiziant.

Ha me, gand ar galloud roet din gand on Tad Santel ar Pab,
a ro deoh an induljañs plenier
hag ar pardon euz hoh oll behejou.
En Ano an TAD hag ar MAB hag ar SPERED SANTEL. AMEN!

Dre Visteriou Santel or Zalver deuet da zavetei an dud,
ra zeuy an Doue oll-halloudeg da rei deoh an distaol euz oll boaniou
ar vuez-mañ hag ar vuez da zond,
da zigeri deoh doriou ar Baradoz
ha da gas ahanoh d'al levenez peurbaduz. EVEL-SE BEZET GREET!

Ra ziskenno warnoh + BENNOZ an Doue oll-halloudeg:
an TAD, ar MAB hag ar SPERED SANTEL.

AMEN !

LENNADENNOU evid AR RE GLANV

Meur a dro a vo kavet da lenn hini pe hini euz al lennadennou amañ warlerh.

Evid eun overenn, evid sakramant an nouenn, pe c'hoaz pa 'z eer da weled eur hlañvour pe da gas dezañ ar gomunion.

Red e vo, evel-just, delher kont euz stad ar hlañvour.

I

Gand ar salmou, e klevom an dên gwasket gand ar boan hag an trubuillou, oh en em erbedi ouz Doue, evel er SALM 85 /1-2, 5-6, 15-16

SALM 85

1. Selaouit, Aotrou, respontit din,
me 'zo eur paour-kêz maleüruz.
2. Beillit warnon, me hag a zo doujuz deoh;
salvit ho servicher e-neus fiziañs ennoh.
5. Aotrou Doue, c'hwi a zo mad ha trugarezuz,
leun a garantez evid ar re a zeu d'ho kolver.
6. Selaouit, Aotrou, va fedenn,
klevit va mouez ouz ho pedi.
15. C'hwi, Aotrou Doue, leun a vadelez hag a drugarez,
difonn da vond e kounnar,
leun a garantez hag a wirionez,
16. Troit ho sell warnon hag ho-pet truez ouzin.

2

E Levr ar Rouaned, e welom ar profed Eliaz, eet dinerz hag ankeniet, ha frealzet gand Doue.

Sav ha debr rag re hir eo an hent a jom ganit da ober.
Ganeom-ni eo ivez hir an hent.

LENNADENN EUZ LEVR KENTA AR ROUANED 19/1-8

1. Ar Roue Akab a lavaras d'e wreg Jezabel
kement e-noa greët ar profed Eliaz,
ha penaoz e-noa lazeta an oll brofeted dre ar hleze.
2. Jezabel a gasas eur hannad daved Eliaz da lavared:
- Ra zeuy an doueed da ober kemend-all din
ha gwasch c'hoaz,
ma ne ran-me ket warhoaz euz da vuez
evel m'az-peus greet euz buez unan anezo.
3. Eliaz a grogas aon ennañ
hag e tehas kuit evid savetei e vuez.
Erruoud a reas e Bersabea, e Bro-juda
hag e lezas eno e zervicher.
4. Eñ avad a gerzas er goueleh 'hed eun devez;
eet eo da azeza e skeud(DISHEOL)eur vodenn valan(VANAL),
hag e-neus goulennet ar hras da vervel, en eur lavared:
- Trawalh am eus, Aotrou Doue! Kemerit va buez diganin,
rag n'on ket gwelloc'h eget va zadou.
5. Neuze e hourvez dindan ar vodenn valan, hag en em ro da gousked.
Med setu eun êl o tond da douch outañ,
ha da lavared dezañ: " Sav ha debr!"
6. Eliaz a zell:e kichen e benn ez eus eur varaenn poazet war vein an oaled,
hag eur podad dour.
Debri hag eva, ha goudeze gourvez adarre.
7. Evid an eil gwach, e teu êl an Aotrou da douch outañ ha da lavared:
- Sav ha debr, a-hendall e vefe re hir an hent evidout!
8. Eliaz a zav; debri hag eva a ra.
Neuze gand an nerz silet ennañ diwar an boued-se,
e ra hent epad daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez,
beteg ar Menez Horeb, menez Doue.

3

Peur 'ta e vo fin d'an noz ?

An dñs santel JOB a zo bet gwasket gand a beb seurd trubuilhou
a gorr hag a spered. Sevel a ra e vouez da glemm ouz an Aotrou Doue.

LENNADENN EUZ LEVR JOB 7/1-4, 6-7

1. Job a gomzas evelhenn:
- Buez an den war an douar a zo eul labour ^{devezour} gopraer,
e zefveziou, re eul labour war hobr;
2. Evel eur ^{devezour} sklavour ema o huanadi war-lerh eun tamm disheol,
evel eur gopraer o hortoz e bae.
3. Evel-se n'am-eus bet da lod
nemed miziou a dristidigez,
ha war va hon+ nemed nozveziou a boan.

4. A-veh eet d'am gwele, e lavaran ennon va-unan :
 - Peur eta e hellin sevel ?
 Peur e vo fin d'an noz ?
 Gwasket e vezañ gand an anken beteg goulou-deiz.
6. Tremenet eo va deiziou buannoh eged bulzun ar gwiader,
 hag eet e-biou:esperañs ebéd mui !
7. Dalhit soñj, Aotrou, n'eo va buez nemed eun êzennig,
 ha ne welo mui va daoulagad an eürusted.

4

Euz va horv, e welin va Doue

A-benn ar fin e sav frealzidigez ha fiziañs e kalon Job.

LENNADENN EUZ LEVR JOB

19/23-27a

23. Piou a roio din gweled va homzou skrivet
 hag o gweled moulet en eul levr,
24. skrivet gand ar munaoued houarn war eur follenn-blomm
 pe garanet er mên?
25. Gouzoud a ran eo beo va divenner,
 hag e savo an diweza war ar boultrenn.
26. Neuze euz va relegou, gwasket ^{gand} ~~euz~~ o hrohen, ~~euz~~
 euz va horv e welin Doue.
27. Me, va-unan, ^{me} her gwelo,
 va daoulagad ^{me} a welo anezañ,
^{me} ha n'eo ket unan all.

oooooooooooo

oooooooooooo

ooooooo